

# Ar galv

Gelver a ran an Awen ha war he lerc'h an Dour, an Tan, an Douar hag an Avel. Amañ e Naoned, asamblez gant oberourien varrek ar gwin e c'houlennan digant nerzhioù ar bed-holl dont amañ ganeomp da dest, da skoazell ha da warez.

## An Dour

E pep buhez emañ an dour. Reiñ teñv d'ar plantou a ra. Lakaat a ra ar greunioù rezin da ronta Sklaer evel lagad an naer e oar bezañ ha diverañ evelti o kammigellañ a dreuz ar geot.

**An dour a red gantañ ene an traoù !**

## An Tan

Tommañ korf an den a ra an tan. An hini diwanet diouzh an heol pe diwar ar c'heuneud. O teviñ e kalon ar gwaz hag e kalon ar vaouez emañ iveau. Tan an den a zo breur da dan an heol, an hini a ro nerzh d'ar rezin hag a lak anezhañ da zareviñ.

**Tan an heol a lak an traoù da gemm !**

## An Douar

Dougen a ra an dud koulz hag al loened, ar gwez, ar plantou, al louzoù, dle kement hini bev war e gein. Magañ a ra ar vuhez en ur reiñ ur stumm da gement tra. Dous e c'hell bezañ dindan seulioù ar botoù pe kaled. Reiñ a ra labour lakaat a ra an dour da redek diwar gorf an den.

**An douar eo an dremmwel ma c'hell pep tra dont da wir !**

## An Avel.

Kas ha digas ar barradoù-glav a ra an avel. Sec'hiñ an douar a ra iveau. Dre ar c'hwezh e sav an aezhenn da fronelloù an den. Kemenn a ra dezhañ kalz a ouziegezh diwar benn an douar. Dre an avel e vez skignet an trouz hag ar c'hwezh, arouezh kentañ da glevet ha da ziskuliañ ar blaz.

**An avel a ro boued d'ar spered.**

Ar greunioù-rezin a zo bugale ganet warlerc'h eured an Heol gant an Douar. O goad gwech darevet er varrikenn a vo unanet gantañ iveau holl Bugale ar Bed. Dre spered ar Gelted, dre ouziegezh an Drouized eo bet ijinet ar varrikenn e koad. Enni e veze soubet an hini a oa da zont bev adarre. Kavell ur vuhez nevez eo ar varrikenn. Digemer a raio-hi ar greunioù dastumet ha lazhet gant labour an den. Hanter ur vuhez hir eo marv ar greun. Dassorc'het e vez ar pep gwellañ deus outo evel ur bugel nevez o tont eus kof e vamm.

Dre hud ar winiennerien, anezho achantourien e vo sevenet an Oberenn veur.

**Ra c'hwezho atav warno avel an Awen ! Ra baro atav warno goulou an Awen !**

**Yec'hed, youc'h ha yaouankiz hirbadus  
da baotred ar gwini, anezho strobinellerien a c'hoarvez dre o labour hud ar  
c'hemmadurioù a gas ar rezin da win !**

**Ra vo mat an dourenn surzhudus gwilioudet el levenez!**

**Ra vo mat d'an dud, ra roio kalon hag huñvreouù dezho !**

**Dindan an heol Lagad an deiz**

**Ra vo mat d'an holl,  
Ra vo mat d'an holl,**

**Ra vo mat d'an holl !**

# L'appel

J'appelle le souffle de l'Inspiration et avec lui l'Eau, le Feu, la Terre et le Vent. Ici à Nantes en compagnie des habiles acteurs du vin, je demande aux forces de l'Univers de nous rejoindre comme témoins, assistance et protection.

## **L'Eau**

En toute vie il y a de l'eau. Elle donne la sève des plantes. Elle fait s'arrondir le grain de raisin. Elle sait être claire comme l'œil du serpent et se mouvoir comme lui à travers l'herbe.

**Avec l'Eau court l'âme des choses.**

## **Le Feu**

Le feu réchauffe le corps de l'Homme, qu'il émane du Soleil ou de la combustion du bois. Il brûle également dans le cœur de l'homme et dans le cœur de la femme. Le feu de l'Homme est le frère du feu du Soleil, celui qui donne de la vigueur au raisin et le fait mûrir.

**Le feu du Soleil apporte le changement aux choses.**

## **La Terre**

Elle porte les hommes, les animaux ainsi que les plantes et les herbes, tous les vivants sur son dos. Elle nourrit la Vie en donnant une forme à toute chose. Elle peut être douce sous la semelle des souliers ou dure. Par le travail qu'elle donne, elle fait couler la sueur du corps de l'Homme.

**La Terre est l'horizon où toute chose devient vraie**

## **Le Vent**

Il porte et emporte les averses de pluie. Il sèche aussi la Terre. Par son souffle, la vapeur monte aux narines de l'Homme. II lui communique beaucoup d'informations sur la Terre. Par le Vent se répandent les sons et les odeurs, prémisses à la perception et à la découverte du goût.

**Le Vent nourrit l'Esprit.**

Les grains de raisin sont les enfants nés du mariage du Soleil et de la Terre. Leur sang une fois mûri dans le tonneau unira tous les Enfants du Monde. Par l'Esprit des Celtes, par la Science des Druides a été inventé le tonneau de bois. Les Celtes y plongeaient autrefois le guerrier qu'on voulait ressusciter. Il est le berceau d'une nouvelle vie. Il recueillera les grains occis par le travail de l'Homme. La mort du grain n'est que le milieu d'une longue vie. Sa quintessence sera revivifiée comme l'enfant sortant du corps de sa mère.

Par l'art magique des Vignerons, véritables enchanteurs, sera réalisé le Grand Œuvre.

**Que souffle toujours sur eux le Vent de l'Inspiration !**

**Que brille toujours sur eux la Lumière de l'Inspiration !**

**Santé, cri de joie et jeunesse éternelle aux hommes de la vigne, ces magiciens dont  
le travail mystérieux transforme le raisin en vin !**

**Que le liquide miraculeux né dans la joie soit bon !**

**Qu'il soit bon pour les Hommes et leur donne du cœur et des rêves !**

**Sous le Soleil Oeil de Lumière**

**Qu'il soit bon pour tous !**

**Qu'il soit bon pour tous !**

**Qu'il soit bon pour tous !**